

Allah's Kanañ

allahskanan.free.fr

Deut va Doue

Diskan : Deut va Doue, Deut da ren em c'halon
Deut d'am magañ dre ar gomunion

Va ene paour a zo ouzh ho kortoz, va Zalver,
Evel un douar yen, skarnilet gant gwall-amzer

Mard eo gwir Ho komzoù, C'hwi a vezo d'am ene
Glao dous an abardaez, ha glizennig ar beure

C'hwi eo ar pastor mat, me an dañvad dianket ;
Edon preizh ar bleizi, hag hoc'h eus va diboaniet

Rak-se 'ta va Jezuz me 'zeu da glask ho pañked
'Vel ma red ar c'haro d'ar feunteun en e zehed

R : *Venez mon Dieu, venez régner en mon cœur,
Venez me nourrir de la communion.*

*Ma pauvre âme Vous attend, mon Sauveur
Comme une terre froide et desséchée.*

*Si Vos paroles sont vraies Vous serez pour mon âme
La douce pluie du soir, la rosée légère du matin.*

*Vous êtes le bon pasteur, je suis la brebis perdue ;
J'étais la proie des loups, Vous m'avez tiré de peine.*

*Aussi, mon Jésus, je me présente à votre banquet,
Comme le cerf assoiffé court à la fontaine d'eau vive.*

~~~~~

*An testennoù-mañ a zo gwarezet, kenkoulz hag ar sonerezh ; an arזורien eo a zo perc'henn warno.  
Au même titre que les musiques et les arrangements, ces textes sont protégés ; ils sont la propriété de leurs auteurs.  
Les textes en français ne sont qu'une traduction de ce qu'expriment les paroles en breton.*